

Anvioù a vanke el levr kentañ

- A -

AUDO, Gabriel

Biel Aodoù

(Bubri 29-05-1908/Persken 17-01-1983)

Saver pezhioù-c'hoari. Mab da Loeiz Aodoù ha da Vari Bolay. Evel e vreur henañ ez eas Biel da Gloerdi bras Gwened hag e voe beleget d'an 08-07-1934. Tremena reas bloaz e S.Teve evel rener skol a-raok bezañ kaset da Lannejenn da gure (1935). E deroù ar bloaz 1949 e voe anvet da berson Persken e-lec'h ma varvas 35 bloaz diwezhatoc'h.

Sevel a reas un nebeud kanaouennoù hag ivez, er bloavezhioù 1950, pezhioù da vezañ c'hoariet gant tud e barrez. Lod eus ar re-mañ a zo bet moulet war *an Doéré* goude e varv.

Kenlab.:

DOER : *Kanenn Bro Persken ; Er bed e chanj* 47/1993 (kan

En dén bouar ba'ti er médesinour ☒ *Me moerebig* 56/1995/2 - 31 (c'hoari).

Dave.:

DOER : 52/1994/15 ; S.R.Gwened 02/1983.

- C -

COLIN, Charles Justin Jean

Charles Yustin Yann Kolin

(Fontenay-aux-Roses (92260) 10-12-1851/??)

Ganet e oa bet Charlez Kolin e Fontenay-aux-Roses (Bro-C'hall) e-lec'h ma oa e dad-kozh maer ar gumun. Mab e oa da Charlez Kolin ha da Irma Ujina Deleine.

Ober a reas e studi e Pariz hag e c'hounezas e zoktorelezh war ar vezegiezh, e 1877, gant un dezenn war skejadenn ar stomog.

Kavout a reomp anezhañ e Kemper er bloaz 1898. Edo, er mare-se, pennvedisin war ar c'hleñvedoù-red evit pastelloù-bro Kemper ha Brieg. Mirout a reas ar garg-se betek 1921 da nebeutañ.

Koll a reomp e roudoù goude-se ha n'hon eus ket kavet e anv war varilh mortuajoù Kemper eus 1921 da 1933.

Levr :

Ar mod da zioual kear euz ar c'hlenvejou stagus (dre an aotrou Colin medicin e Kemper)

Kemper, e ti A.Jaouen, 1901, 16p.

CREFF , Hervé Marie

Herve Mari Kreñv

Ar Beachour, Greff, Eguile

(Gwikar 13-07-1896/Landerne 21-01-1990)

N'hon eus ket kavet kalz a ditouroù diwarbenn Herve Greñv. Mab e oa da Wilherm Greñv ha da Frañseza Boderioù, labourerien-douar e Kerivin, e Gwikar. Dimeziñ a reas gant Anna-Vari Tomaz, e Gwikar, d'an 20 a viz Gwengolo 1926. War-lerc'h ar brezel e taolennas, er gelaouenn *Kroaz Breiz*, an doare-bevañ war ar maez, damdost da Landivizio, e deroù ar c'hantved-mañ.

Kenlab.:

KROB : *Ar veilhadez e Kerwenn, wardro ar bloavez 1900, 9/1949/11* ☒ *Gwechall e Kerwenn... ha breman* 26-27/1950/17.

Dave. :

Dielloù ti-kêr Gwikar.

- D -

DAHELLOU, Henri

Herri Daheloù

(XIV^{vet} kantved)

Adskriver en eskopti Kemper. Lezet en deus ur frazenn diechu e brezhoneg-krenn en ul levr savet e latin, diwar-benn reolenn urzh Karmez, eilskrivet gantañ er bloaz 1360 : *Nep na ra mat her dra guieli dezo*. Ar frazenn-se a zo bet kavet gant Anton Tomaz e 1918. Posupl eo bet, a-drugarez d'ur gavadenn all, graet gant Léon Fleuriot* war-dro 1960, adsevel ar frazenn en he fezh : *Nep na ra mat her dra guel / dezouf beh unan be fel*. Da lavarout eo e brezhoneg bremañ : *Nep na ra mat endra c'hell / Dezhañ e-unan eo fell*.

Dave :

Arzel Even, *Istor ar yezhoù keltiek*; Chr.-J. Guyonvarc'h: *Le Catholicon de Jehan Lagadeuc*, Roazhon, 1975, p.LXXIX; ABKE: Eost/1963/138; ECL :X/167 hag XI/158.

DANIEL, André Yves Marie

Andrev Erwan Vari Daniel

Erwanig

(Lannuon 14-09-1902/Pariz (75017) 18-03-1989)

Stourmer war an dachenn sevenadurel. Mab e oa da Erwan Vari Daniel, eus Peurid-ar-Roc'h, ha da Vari-Frañseza Person, eus Benac'h, baraerien e Lannuon.

Tapet gantañ e vachelouriezh war ar skiantoù e Lannuon ez eas da Ensavadur Kimiezh Pariz, e 1924, e sell da vezañ ijinour. Er skol-se an hini eo e reas anaoudegezh gant Herve Mazhe* a zeuas da vezañ e vignon hag e genstourmer e Strollad Ar Vrezhonegerien (S.A.V.) e Pariz. Pa voe krouet ar gelc'hgelaouenn *Sav* (1936) e voe Andrev Daniel ar sekretour hag ar merour anezhi adalek ar pempvet niverenn (goañv 1937) betek ar fin (nevezamzer 1944). Mont a reas reizh an

traoù betek ar brezel. Neuze e krogas ar boliserien da heskinañ anezhañ, eñ hag e vignoned. E miz Here 1939 e voe furchet-difurchet e di hag e voe kaset gant ar boliserien e holl levrioù brezhonek hag ivez levrioù ar c'hontoù. E nevezamzer 1940 e voe serret Kêr-Vreizh, ul lec'h krouet straed Sant-Plasid e Pariz gant ar vrezhonegerien evit o bodadegoù, ha lakaet ar sielloù war an nor. War un dro e voe nac'het outo kenderc'hel da embann *Sav* hag anv e oa da "zastum" ar renerien, Mazhe ha Daniel, evit serriñ anezho e-barzh ur c'hamp. Saveteet e voent gant an arsav-brezel ha gallout a reas ar gelaouenn bezañ moulet adarre.

War un dro e roe Andrev Deniel kentelioù brezhonek e Kêr-Vreizh. Ar re-mañ, priziet-bras, a zo bet moulet gantañ e 1942 ha 1944.

Labourat a reas a, Deniel, e-pad ar brezel, evel ijinour-merour, e ti Vernol, en Argenteuil (95100). N'ouzon ket re ar pezh a reas goude-se. War hon eus klevet ez eas da labourat da Vrazil ur prantad kent distreiñ da Bariz da vevañ war e leve.

Dall e oa e fin e vuhez hag en em lazhañ a reas, an deiz ma varvas e wreg, Anna Isnard, evel m'en doa prometet en a-raok.

Levr.:

Premier cours de breton, Emb. Ker-Vreiz, Pariz, I.C.A., Brest, 1942, 265 x 215, 68 p., eil moul. Emb. Armorica, I.C.A., Brest, 1944, 66p.

Kenlab.:

SAV: *Jili an tort* 4/1936/15 ☒ *Yer giz nevez* 31/1944/25.

LLMM: *E koun Herve Maze* 96/1963/42.

Dave.:

LLMM 96/1963/33 ; LANV : 82/1998/21 ; Abeozen p.140.

DAVID, Jean Joseph

Yann Jozeb David

Jerom ar Born

(Tregourez 25-01-1841/Tregourez 24-02-1891)

Goude bezañ bet beleget (1866) e voe kaset da gelenn ar jedoniezh ha, goude-se, an

helavarouriezh e Skolaj Pontekroaz. Er bloavezh 1879 e voe fiziet parrez Beuzegar-C'hab ennañ e-lec'h ma chomas betek miz Genver 1891 pa roas e zilez. Klañv e oa d'ar mare-se moarvat rak mervel a reas, ur miz diwezhatoc'h hepken, e Tregourez, e barrez c'henidik, e-lec'h ma oa aet da ziskuizhañ.

Levr.:

Disput etre Jakez Lamrog ha Ian an Digariou, renket gant Jerom ar Born, Timoul. J-B. Lefournier Henañ, Brest, 1872, 56p.

Dave.:

Dielloù eskopti Kemper.

DIVANAC'H, Marcel Pierre Marie**Marsel Pêr Mari Divanac'h**

(Leskonil-Pornaleg 07-08-1908/Pont-'n-Abad 19-09-1978)

Saver danevelloù. Bet ganet e Menez Meilh, e Leskonil. Mab e oa da Gaourintin Divanac'h, pesketaer, ha da Vari ar C'hozh. Pa oa bugel e tarempredas ur miliner kozh a gontas dezhañ meur a varvailh na voent ankounac'haet biken gantañ. Kuitaat a reas skol e vourc'h, e 1921, evit mont da Gonk-Kernev d'an E.P.S. (Skol gentañ uhel), ha, goude-se, da Skol-vistri Gemper. Anvet e voe da skolaer e Penmarc'h da gentañ ha, goude-se, e Sant-Yann-Drolimon e-lec'h ma chomas ouzhpenn ugent vloaz. Dimeziñ a reas gant Marc'harid Bizien, d'ar 04-04-1931, e Pornaleg. E Sant-Yann-Drolimon e reas war-dro ur c'helc'h keltiek hag ur skipailh-sport krouet gantañ evit e skolidi. Rener skol e voe ivez e Brest a-raok mont da vevañ war e leve e Pont-'n-Abad.

Lakaat a reas dre skrid ar c'hontadennoù bet klevet gantañ en e yaouankiz hag un ti-embann a savas (*Emb. ar miliner kozh*) da embann e levrioù skrivet en ur yezh rannyezhel-kenañ. Ofiser an Akademiezh e oa Marsel Divanac'h.

Levr.:

Contes et souvenirs de Cornouaille (divyezhek), Emb. ar miliner kozh, Brest, 1971.

Ar medisin eneb dezañ (divyezhek), Emb. ar miliner kozh, Brest, moull. arnevez, Sant-Brieg, h.b., [1973 ?], 35p.

Ar garantez medisin (divyezhek), Emb. ar miliner kozh, I.C.A. Brest, h.b. [1974], 35p.

Loup de mer, son fils bachelier et le fayot rouge (divyezhek), Emb. ar miliner kozh, Brest, 1973, 158p.

Ar moroc'h fougaser (divyezhek), Emb. ar miliner kozh, Brest, 1973, 18p.

Thumette bigouenne (divyezhek), Emb. ar miliner kozh, Brest, 1974, 254p.

Kenlab :

BRUD : *Tomazig ha Mahi* 2/1957/87 ☒ *Ar verh nevez dreset* 7/1959/84.

BLBR : *Abardaez ruz* 221/1980/33 (dalif)

Dave.:

Annuaire des 10000 Bretons, p. 522.

DONNIOU, Guillaume Marie**Lomig Mari Donnioù**

(Plounevez-Kintin 22-12-1903/Rostrenen 15-07-1986)

Kaner pobl bet ganet e kêriadenn ar Golledig e Plounevez-Kintin. Mab e oa da Bêr-Mari Donnioù ha da Vari-Anna-Loeiza Moazan. E 1948 e tigoras un davarn e Rostrenenn, straed Sant-Brieg, *Le Lion d'Or* hec'h anv, a zeuas da vezañ, a-drugarez dezhañ, un doare kreizenn sevenadurel, lec'h-emgav holl dañserien ha kanerien ar c'horn-bro. Chom a reas dizimez e vuhez-pad.

Lomig Donnioù a voe ezel oberiant Kelc'h Keltiek Rostrenenn, prezidant anezhañ eus 1954 da 1972, ha brudet-bras e oa er festoù-noz evel kaner ha koroller.

Un niver bras a werzioù, anavezet gantañ, a zo bet enrollet war bladennoù. E dibenn e vuhez e voe embannet un nebeud skridoù gantañ e-barzh *Brud Nevez*.

Kenlab.:

BRUN : *Doni Done, setu noz ar bloaz nevez* 60/1982/15 ☒ *Toull ar bleiz* 85/1985/9.

Dave.:

Lizher person Plounevez-Kintin ; AMGZ :
353/1999/52

- F -**FLOC'H, Yves-Marie*****Youenn Vari Floc'h***

(Plougerne 24-05-1906/Douarnenez 12-08-1990)

Livour impresionist. Mab da Frañsez Floc'h, labourer-douar er C'harrbont e Plougerne ha da Frañseza Bodenez, kannerez. Advabet e voe gant ar Stad c'hall d'e 14 vloaz

Yann-Vari Perrot* an hini eo a verzas donezon ar paotrig evit an tresañ hag e aliañ a reas da vont da Roazhon, da Skol an Arzoù-kaer (1927-28). Goude-se ez eas ar paotr yaouank da Bariz da Skol an Arzoù-kinklañ ha, gounezet e desteni gantañ, e voe anvet da gelenner e Skolaj Saint-Dié (88100) e miz Kerzu 1934.

E-pad e vloavezhioù-studi e roas skridoù skeudennaouet gantañ da *Feiz ha Breiz* ha tresadennoù evit goloioù ar gelaouenn (da skouer : Pask 1934). E Sant-Laorañs-ar-Mor e timezas gant Marc'harid-Mari-Madalen Villard, d'an 22-07-1938, hag an oferenn-eured a voe lidet gant e vignon Yann-Vari Perrot. Galvet e voe da soudard e 1939, paket gant an enebourien ha kaset da Vro-Alamagn e-lec'h ma chomas e-pad nav miz. Pa voe dieubet ez eas adarre da gelenner war an tresañ e Lise an Oriant hag, e 1942, e Lise Dinan. Eno e chomas betek e retred. Youenn ar Floc'h eo a dresas golo ar gelaouenn *Barr-Heol* e 1956.

Kenlab.:

FHAB : *Sul ar Zakramant bras e Roazhon* 8/1927/171 ☒ *Bered kozh Kerlerdut* 11/1934/471.

Dave.

M.Renouard, *Dictionnaire de Bretagne*, Tours, 1992, p.104.

- G -**GEFFROY, André*****Andrev Jafre***

Gud ; Gudren ; Mir-e-yezh ; le grand Geff
(Lannuon 21-01-1911/Plougerne 13-05-1986)

Stourmer breizhat. Mab e oa da Frañsez Juluan Jafre, didilher lin, ha da Anna Vari 'n Olieroù. Trizek vloaz e oa hepken pa reas Mordrel* war e dro ha c'hwezek vloaz pa emezelas ouzh S.B.B. da-geñver Kendalc'h Rosporden, e 1927. Kregiñ a reas diouzhtu da ober bruderezh e rannvro Lannuon a-raok mont d'ober e goñje-soudard, e 1929, e sonerezh an 71vet R.T. (rejimant troadeien). Pevar bloaz goude, d'ar 17-06-1933, e timezas e Châtillon (92320) gant ur Vretonez, Herried Aouregan.

E-kerzh an hañv e 1936 e voe krouet gant Célestin Lainé* (Neven Henaff) ar "Gadervenn", ur strollad stourm gourdonet start. E-touez an daouzek den kentañ engouestlet er bagad-se e oa Jafre. Paket e voe gant ar boliserien, e miz Mae 1938, evit bezañ bastrouilhet savadurioù Stad e Roazhon hag e Sant-Brieg peurgetket, gant enskrivadurioù dispac'hus.

Er bloaz 1939 ez eas gant e familh da Lokireg da chom, da sevel deñved el lec'h anvet ar Run Wenn. Kemer a reas perzh, e miz Eost 1939, en afer a vag *Gwalarn*, da lavarout eo un dilestradeg armoù e Beg-ar-Fri. Ur pennadig goude-se e voe engalvet er 248vet RI (rejimant trodeien) hag edo e Dukark pa voe bombezet start gant an nijerezh alaman ar gêr-se pa oa ar soudarded o lestrañ evit mont da Vro-Saoz. Distreiñ a reas Jafre da Lokireg, goude emglevioù Montoire, e dibenn miz Gouere 1940 ha kenderc'hel a reas da vezañ ezel eus ar *Gadervenn*.

Pa voe krouet ar Bezenn Perrot, e dibenn 1943, e voe kinniget dezhañ gant Neven Henaff kemer penn ar strollad-se. Nac'hañ a reas Jafre diouzhtu dre ne oa ket ar Bezenn un arme emren o stourm gant ul lifre

breizhek. Evit ar memes abeg e nac'has heuliañ kirri Henaff hag e soudarded dagañver o souzadenn etrezek Alamagn e miz Eost 1944 hag ez eas da brizoniad, a-youlvat, da Vontroulez, d'ar 17 a viz Gwengolo 1944. Bac'het e voe e Landerne hag e Maezgoagen a-raok tremen dirak lez-varn Kemper ha bezañ kondaonet d'ar galeoù hed-buhez (15-02-1945). Kaset e voe da Fontevrault da gentañ ha, goude-se da Fresnes, d'an 30-11-1949. Eno edo pa c'hounezas, e 1950, priz kentañ ar c'hontadennoù gant *Ar gouloù-koar benniget* embannet un tammig diwezhatoc'h e-barzh *al Liamm*. Met un afer all a oa o paouez tarzhañ. Tamallet e voe d'ar prizoniad bezañ deroet daou spier saoz, Redding hag Abott o anv, d'an Alamaned. Daoust d'e zinac'h nerzhus ha d'an diouer a brouennoù e voe kondaonet Jafre ur wech c'hoazh, met d'ar marv ar wech-se, e miz Du 1951. Da heul ar varnadenn-se e savas mesk bras er broioù keltiek. Ur stourmad kreñv a grogas du-hont e kelaouennoù Breizh-Veur diwar atiz tud evel Gwynfor Evans, Joyce Williams pe an doktorez Noelle Davies. A-drugarez dezho e voe saveteet Jafre eus ar marv hag, a-benn ar fin, e voe lezet da vont, d'ar 14 a viz Ebrel 1954, dre walc'h René Coty, prezidant ar Republik c'hall, goude bezañ bet ereet e dreid e-pad 605 deiz.

Ur pennad war-lerc'h, e wreg kentañ o vezañ marv, ec'h addimezas gant Lea Duduyer er Releg-Kerhuon, d'ar 17-07-1954 hag e tibriedas e 1963. Bevañ a reas neuze e rannvro Vrest e-lec'h ma talc'has, e-pad ur mare, ur stal strilheoul hag e varvas e Plougerne d'e 75 vloaz.

Kenlab.:

BREI : *Ar c'houer hag ar marc'hadour* 1/1927/4 ☒ *Yan Vourdou* 403/1935/2

BRAT : *Ar vuhez 'zo un emgann* 283/1937/4 ☒ *An hent mat nemetañ* 320/1939/2

HEUB : *Diouganouñ deut da wir* 4/1940/3.

ARVO : *Brezhoneg da lenn* 101/1942/1.

LLMM : *Ar gouloù-koar benniget* 24/1951/27.

Dave. :

R. Caerleon, *Au Village des condamnés à mort*, La Table Ronde, Pariz, 1970, 349p.; Dr N. Davies, *The case of Andreo Geffroy*, Swansea, 1952, 8p.; *Le Parisien Libéré* "La mort pour André Geffroy" 2230/14-11-1951/1 ha 10; BPAR.2 *La peine de mort pour avoir dénoncé deux Anglais* 263/16-11-1951 hag *Un fait nouveau dans l'affaire Geffroy* 25/11/1952.

GUILLOU, François

Frañsez Gwilhoù

(Lokireg 29-12-1799/Dinan 12-11-1858)

Bet beleget e 1827 hag anvet da gure e Kastellin. Chom a reas eno daou vloaz hepken a-raok bezañ kaset da berson, lerc'h-ouzh-lerc'h e Sant-Evarzeg (1829), Kernevel (1831), Kerglof (1837) ha Kerien (1840). Kuitaat a reas ar barrez diwezhañ-mañ, er bloaz 1855, evit mont da aluzener gant Frered S. Yann Doue, e Dinan, e lec'h ma varvas.

Levr.:

Avanturiou un den yaouanq a Vreiz-Izel, Ti-moul. Ledan, Montroulez, 1830.

Dave.:

Dielloù eskopti Sant-Brieg.

- H -

HERPIN, Pierre Edmond Patient

Pêr Edmont Pasiant Herpin

(Savigny-en-Sancerre (18240) 17-12-1810/Roazhon 28-09-1885)

Beleg. Ober a reas e studi e Kloerdi bras Bourges (18000). N'ouzer ket perak e c'houlennas un aotreadenn evit mont da eskopti Kemper el lec'h ma voe beleget d'an 23-07-1837 hag anvet da gelenner e Skolaj Lesneven.

Daou vloaz goude e teue er-maez ar *Barzaz Breiz* hag entanet e voe Herpin, marteze a-walc'h, gant yezh pennoberenn Kervarker. E fichenn, miret en eskopti, ne lavar ket

deomp pegeit e chomas e Breizh-Izel met desket e oa bet brezhoneg gantañ pa'z eas da Skolaj sant Visant Roazhon da gelenner. Eno e oa pa lakaas moullañ e levrig er bloaz 1870.

Levr.:

Laez ann den paour. Ti-moul. Hauvespre, Roazhon, 1870, 14p.

Dave.:

Dielloù eskopti Kemper.

- j -

JÉZÉQUEL, René**Ronan Yezekel**

(Taole 30-01-1803 / Kleder 18-01-1887)

War-lerc'h bezañ bet beleget, er bloaz 1826, ez eas da Blouarzhel da gure ha, bloaz goude, da Blouigno. E 1831 e voe anvet da berson e Lanneoù hag, e 1836, e Kleder el lec'h ma chomas ouzhpenn hanter-kant vloaz. Mervel a reas, skoet gant droug-armoug, d'e 84 bloaz. Brudet e oa moarvat rak obidoù hollgaer a oa bet graet dezhañ gant tri-ugent beleg.

Levr.:

Breuziezh an Itron Varia a esperanç etablisset e parres Cleder, gant daou gantik, *Itron Varia a esperanç ha Salve Regina*. Ti-moul. Lefournier, Brest, h.b. [1855], 12p.

Dave.:

Dielloù eskopti Kemper.

JENKINS, Alfred Llenwelyn**Alfred Llenwelyn Jenkins**

(Montroulez 27-11-1846 / Montroulez 01-11-1924)

Pastor badezour, mab da John Jenkins ha da Elesbed Hooks. Ober a reas e studioù e Londrez, e Skol ar Visionerien ha, goude-se, e Kelenndi Regent's Park. Distroet da Vreizh e voe kelenner e Skolaj Montroulez. Dimeziñ a reas gant ur brotrestantez, miss Van Eeckout. Anvet e voe da bastor Montroulez, gant *Kevredigezh ar*

Visionerien Vatist, er bloaz 1872, war-lerc'h marv e dad. Derc'hel a reas ar garg-se betek e zilez, e 1920, en abeg d'e yec'hed o vont war fallaat. Mervel a reas pevar bloaz diwezhatoc'h.

Alfred Jenkins a voe ur c'heltiegour ampart evel e dad. Lakaat a reas adembann meur a wech *An Testamant Nevez* hag ivez arroudoù eus *Aviel Sant Ian*. Eñ an hini eo a droas *Levr ar Genes* a voe moulet ent-dizany, e Bro-Saoz moarvat.

Levr.:

Moues ar C'hristen, pe canaouennou spirituel a gelen vad hag a veuleudi da Zoue, Ed. Anner, Brest, 12p., in-12.

Ar Bibl santel; Levr ar Genes, troet e brezonec ha reizet hervez ar vam-scrid hebre, Emb. e Pariz, 1897, 172 p., in-8.

Dave.:

Loeiz Dujardin, "Les protestants et la langue bretonne" e-barzh *Bulletin de la Société de l'histoire du Protestantisme*, 1950, p. 71-75.

- L -

LEBRETON, Paul**Paol ar Breton**

(XIX^{vet} kantved)

N'hon eus titour ebet diwar-benn an den-mañ a skrivas ul levrig skiantel en XIX^{vet} kantved. Ne grede ket d'an oberour e vije posupl d'an dud kerzhout un deiz war al loar ha planedennoù all: «Ar voyenou a ro ar brovidanç da beb tra crouet da veva er plaç zo marquet déan : arabat é demp eta caout impossubl e nefe Doue gouêt ober habitantet evit an êol».

Levr.:

Studi war an astrou, grêt gant Paul Lebreton, Ti-moul. Lefournier, Brest, 1848, 35p.

LE CANN, Jacques Emmanuel**Jakez Emmanuel ar C'hann**

Potr L.N.

(Logonna-Daoulaz 31-01-1886/Logonna-Daoulaz 03-02-1972)

Eñvorenour. Mab da Olier ar C'hann ha da Anna Filomena Liskivid, labourerien-douar e Hellen, e parrez Logonna-Daoulaz. Ac'hano an anv-pluenn kemeret gantañ : POTR L.N. Mervel a reas e dad abred awalc'h ha derc'hel a reas Jakez, neuze, an atant gant e vamm.

Mignon a-viskoazh e oa da Yann-Vari Perrot* ha, pa fellas da rener *Feiz ha Breiz* adsevel c'hoariva Keryann, e miz Ebrel 1913, ez eas ar C'hann a zor da zor da zastum "gwenneg ar vro". Eñ an hini eo a roas ar prof brasañ : ur skoed ; e vamm, hi, a roas pevar real (FHAB miz Mezheven 1913, p.189).

Galvet e voe da soudard e 1914 ha kaset da Vro-Rusia, e 1917-18, war-lerc'h an emglev sinet gant Nikolaz II ha Poincaré, evit deskiñ da ganolerien Rusia ober gwelloc'h o labour. En em gavout a reas e Moskov e-kreiz an Dispac'h hag e skrivas e brezhoneg, deiz-ha-deiz, ar pezh a welas hag a glevas war ur c'harnedig adkavet nebeudik zo. Distreiñ a reas da Logonna pa voe disoudardet hag e timezas, diwezhat awalc'h, gant Mari-Anna Brelived (13-07-1930). Hervez e gerent en dije graet war-dro ur strollad-c'hoariva, er bloavezhioù 1930, e rannvro Daoulaz. Ur mailh evit diskoulmañ an divinadennoù e oa Jakez ar C'hann ha meneget e vez alies e anv war rolloù ar c'hounideien embannet gant *Feiz ha Breiz*.

Kenlab.

FHAB: *Potr e dog voulouzet* (kontadenn) 5/miz Du 1919/133 ☒ *Bloavez mat da Yann Gouard* (kan) 7/miz Genver 1920/197.

Kas a reas ivez, a-wechoù, divinadennoù da ziskoulmañ, e miz Mezheven 1914, miz Du 1925, miz Ebrel 1928...

Dave.:

Paolig Kombod : *Un Breton chez les Bolcheviks*, emb. Skol Vreizh, Niv.29, Montroulez, 1993, 82p.

LE GUÉDÈS (Michel)

Mikael ar Gedez

[An Ospital 29-09-1847/Plouvorn 22-12-1906]

Saver levrioù devosion. Beleget e voe e miz Meurzh 1872 hag anvet da gure e Kastellin. Goude-se e voe lakaet da berson, lerc'h-ouzh-lerc'h e Pluguen (1886), e Pleiber-Krist (1893) hag, a-benn ar fin, e Plouvorn (1899) e-lec'h ma varvas.

Er bloaz 1899 e voe e-touez ar veleien a zivizas reiñ un eil buhez da *Feiz ha Breiz*, aet da get e 1884, hag e penn dalc'hidi ar Gonideg e voe pa savas un dael hir diwar-benn an doare-skrivañ da zegemer gant ar gelaouenn, e-kerzh bodadeg Landerne, d'ar 04-09-1900.

Levr.:

Levre Trede Urz Sant Fransez evid tud ar bed renket a-nevez e brezounek, gand an aotrou Guedes, person Plugüen. Ti-moul. Kerangall, Kemper, 1888, in-16, 92p; eil emb. Ti-moul. ar C'hastell, Brest, 1906, in-16, 100p. (gant person Plouvorn).

LE MEUR

Ar Meur

Diaes eo lavarout, hep aon da fasiañ, piv eo oberour al levrig savet diwar-benn ar Pab, moulet e Sant-Brieg e 1860 ha sinet ar Meur, hep anv-badez ebet. Tri beleg anvet evel-se a oa o vevañ en eskopti Sant-Brieg er bloavezh-se.

Rasket hon eus Frañsez Mari ar Meur (Plouared 22-05-1838/Sant-Drian 06-10-1917) rak ne voe beleget nemet e 1862. Edo er c'hloerdi, eta, e 1860. Chom a ra :

(1) Yann Loeiz ar Meur

(Plouared 18-04-1825/Eskopti Châlons, goude 1876)

Beleget d'an 22-12-1849 ha lakaet da gure e Plougonveur (1850). Aluzener e Kastell-Laouenan e Paoul e 1850. Kure e Pleuveur-Bodoù (1854). Lestret e voe war ar Jemmapes evel aluzener ar verdeadurezh e-pad brezel Krimea (1855). Kure en Eviaz (1856), Plistin (1857) ha Priel (1859). Anvet da berson er Merzher-Gwengamp

(1861), e Tredarzeg (1867), e Gurunuhel (1869) hag, a-benn ar fin, e Lanrodeg (1874) a-raok mont kuit da eskopti Châlons (51000) e 1876. Koll a reomp e roud goude-se.

(2) *Frañsez-Mari ar Meur*
(Plouha 31-03-1833 / Treglañviz 23-05-1873)

Beleget d'ar 15-12-1859 hag anvet diouzhtu da gure e Gras-Gwengamp. Kure e Pontrev (1862) ha Treglañviz (1865) e-lec'h ma varvas.

Levr.:

Var sujet an Tad Santel ar Pab, Ti-moul Prudhomme, S.Brieg, 1860, 14p.

Dave.:

Dielloù eskopti Sant-Brieg.

LE ROY, Jean-Marie

Yann Vari ar Roue

(Plijidi 21-04-1905/Plijidi 23-03-1942)

Kenlabourer da *Feiz ha Breiz*. Bet beleget d'an 21-12-1929 ha kaset da Skol Gampostal Rostrenenn da evezhier. Tost goude e voe anvet da gelenner war ar jedoniezh. Ouzhpenn-se e reas war-dro parrez Sant-Servez (oferennoù, katekizoù, gousperoù, prezennoù, h.a.) e-pad un toullad bloavezhioù.

Galvet e voe da adsoudard e Gwengamp, er bloaz 1939, daoust d'e yec'hed fall, hag eno eo, hep mar ebet, e pakas e fall. Disoudardet e voe a-benn seizh miz hag e teuas da Blijidi, e ti e dud, el lec'h ma varvas daou vloaz diwezhatoc'h.

Kenlab.:

FHAB *Ar c'haz hag ar vrinnigenn* 3-4/1941/25 ☒ *Ar vuhez e Pariz* 3-4/1943/254.

Dave.:

SREL Sant-Brieg 05-04-1942/160 ha 17-04-1942/181.

LE SAINT, Yves

Erwan ar Sant

(Kemper-Gwezhenneg 28-11-1918/Ploubêr 20-12-1990)

Beleg. Goude e dremen e Kloerdi bras Sant-Brieg e voe beleget d'an 19-06-1943 hag anvet da gelenner e Skolaj I-V. Wengamp. Kure e Boulvriag a oa abaoe 1948 pa voe anvet da sekretour Kevredigezh Bleuñ-Brug Treger ha Goueloù e miz Du 1953. Bet person ar Chapel-Nevez e 1960, person Brelevenez e 1968 ha karget peurgetket eus ar barrezianed diwar ar maez. Bet c'hoazh person an Trevoù eus 1975 da 1990 a-raok mont da bresbital Ploubêr e miz Gwengolo evit bevañ war e leve. Eno e varvas a-raok fin ar bloavezh.

War hon eus klevet e oa kenderv Erwan ar Sant da Armañs ar C'halvez* krouer Skol gristen vrezhonek Ploueg-ar-Mor hag ar gelaouenn *Skol*.

Kenlab.:

BAHE : *Ar skolioù* 1A/1953/3 ☒ *Xvet bloavezh marv E. Rivoallan* 68/1971/3.

Dave.:

SREL Sant-Brieg.

- M -

MAURICE, Jean

Yann Moris

(Priel 29-10-1904 / Gwenganp 03-09-1976)

Beleg. Ober a reas e studioù e Kloerdi bihan Landreger hag e Karmel Sant-Brieg (1924). Edo e Kloerdi Sant-Brieg, e 1927, pa rankas mont d'ober e goñje-soudard e kazarn ar Pépinière e Pariz. Beleget e voe da Nedeleg 1928 hag anvet da skolaer e skol gristen Plouilio. Edo skolaer e Sant-Bernez Bear abaoe 1937 pa voe ret dezhañ mont d'ar brezel. Paket e voe gant an Alamaned ha bac'het e stalag Sagan. Dieubet e voe e miz Here 1941 en abeg d'e yec'hed o vont war fallaat hag e chomas en un ospital parizian da vezañ louzaouet a-

raok adkemer e abostolerezh evel person Mantallod ha Koñfort-Berc'hed e miz Here 1942. Bloaz goude ez eas da berson e Brelevenez-Lannuon (1943) e-lec'h ma chomas naontek vloaz. D'ar 16 a viz Eost 1962 e voe anvet da berson Sant-Jili-ar-C'hoad met fall e oa e yec'hed abaoe ar brezel hag e zilez a roas e miz Gwengolo 1974. En em dennañ a reas e Priel, e barrez c'henidik, met berr e voe e retred rak daou vloaz goude hepken e varve e ospital Gwengamp.

Lezet en deus war e lerc'h ur c'haier, dek barzhoneg ennañ, savet gantañ etre 1924 ha 1928 p'edo er c'hloerdi. Ar barzhonegoù-se, awenet brav gant karantez Vreizh, a zo chomet diembann betek bremañ.

Barzhonegoù :

Koulmig Priel ; Abarde ; Ma bro ; Breiz ac'h a da zihuni ; Gourc'hemeno al lonker ; Dispriz ; Goude an tennan bilhed ; Da zoudard ; Blavez mad d'eur mignon ; Da zant Josef.

Dave.:

Dielloù eskopti Sant-Brieg.

MORGANT, Auguste

Aogust Morgant

(Kastell-Paol 01-01-1837/ Kerbêr-Brest 11-04-1897)

Skrivagner relijiel. Bet beleget er bloaz 1861 hag anvet da gelenner e Kastell-Paol. Bet kure e Sant-Mazhev-Montroulez (1864), e Brest-Rekourañs (1867) hag en Enez-Vaz (1870) a-raok bezañ lakaet e penn parrez Sibirill (1877). Eno e chomas seizh vloaz a-raok bezañ kaset da Ouenoù e 1884 ha da Gerbêr, e 1889, e-lec'h ma varvas.

Sevel a reas prezennoù diwar-benn an dek gourc'hemenn, evit ar misionoù hag ar retredoù, a voe embannet gant un talbenn e galleg, goude marv an oberour, gant e vreur Charlez, person Skrigneg.

Levr.:

Conférences sur le décalogue, Ti-moul. ar Gwaziou, Montroulez, 1910, in-16, 144p.

- P -

PRIGENT, François Marie

Frañsez Mari Prijant

(Plouganou 23-11-1919/Laval (53000) 23-10-1989)

Ganet eo bet er Wern, e Plouganou. Mab e oa da Vark Prijant ha da Berinaig Gwioñvarc'h. Dimeziñ a reas e Plouganou gant Anna-Vari Bodras d'ar 27 a viz Meurzh 1951 hag e yeas da Laval (53000) da labourat. Daoust dezhañ bevañ pell diouzh ar vro e chomas Frañsez Prijant stag ouzh hor yezh hag eus Laval ez ae ingal da Skol-Veur Roazhon betek gounit ur skrid-testeni war ar brezhoneg, ur yezh kelennet gantañ e Kelc'h Erispoe Laval.

Sevel a reas un dastumad testennoù berr moulet gant Hor Yezh goude e varv dindan an talbenn *Plouganou va bro*.

Levr.:

Dalif : *Plouganou va bro*, Hor Yezh, 1997, 134p.

Kenlab.:

LLMM : *Truez* 270/1992/3.

Dave.:

BREM : 190-91/1997/29.

- R -

RICHARD, Stanislas Pascal

Stanislaz Paskal Richarzh

(Enez Sun 19-04-1908/Enez Sun 31-12-1977)

Misioner ha geriadurour. Mab e oa da Bêr Richarzh ha da Mari-Janed Kuilhandr. Mont a reas da besketa, gwech ha gwech all e-kerzh e vugaleaj, gant martoloded an enez. Levezonet moarvat gant ur misioner bennak ez eas, war dro 1922, da skol Gouestlidi Maria krouet-dinamm (O.M.I.) hag edo er mare-se e Saint-Hélier (Jerze). Tremen a reas eno pemp bloavezh da

nebeutañ. Gwiskañ a reas an dilhad-beleg er bloaz 1928 e leandi ar Ouestlidi a oa e Coigny (50250), tost da gCarantan. Ober a reas e ouestloù kentañ en enez Verder (Bro-Wened), d'ar 15-08-1929, a-raok kenderc'hel gant e studi e Liège (Belgia). E ouestloù da vat a reas eno d'ar 15-08-1933. Bet beleget moarvat e La Brosse-Montceaux (77130) e miz Gouere 1935, a-raok bezañ lamet ul lounezh klañv dioutañ e Pariz, e fin ar memes bloavezh. D'ar 6 a viz Mae 1936 e voe kaset da "Di Sant-Brieg" da visioniñ e Breizh-Izel. N'ouzer ket re perak e voe kaset da Di Angers, e pinijenn, war-dro 1954. Er bloaz 1960, koulskoude, e oa distro da Sant-Brieg e-lec'h ma labourer dija da sevel ur geriadur brezhonek.

Goude ma voe serret Ti Sant-Brieg ha divodet ar visionerien, e 1969, ez eas kuit an tad Richarzh da adkavout pirc'hirinaj Sant Walfroy en Ardennoù.

Distreiñ a rae alies da Vreizh koulskoude ha, dreist-holl, da Enez-Sun e-lec'h ma oa bet prenet gantañ daou v-"blockhaus" alaman, deuet da vezañ e annez, hag anvet gantañ ar *C'hremlin* hag ar *Vatikan*. Eno e savas ur levr gallek *Sein, l'Ile des Trépassés*.

Ret e voe dezhañ mont da ospital Vrest e 1977 en abeg d'e yec'hed o vont war fallaat hag eno e varvas deiz diwezhañ ar bloaz. E varv a zo marilhet e ti-kêr an enez.

Lezel a reas war e lerc'h ur pezh geriadur brezhoneg-galleg, pevarzek kaier anezhañ, miret e levraoueg Landevenneg.

- S -

SAUVÉ, Léopold François

(Sant-Jord-Restembaod 04-12-1837/Boulogne-sur-Mer (62200) 07-01-1892)

Gwerinoniour ha dastumer krennlavarioù ganet, evel an tad Juluan Maner*, e Sant-Jord-Restembaod (Breizh-Uhel). Mont a reas da labourat da Vrest ha da Gemper evel komis ar maltouterezh a-raok bezañ anvet

da zastumer-tailhoù en Aber-Ac'h (Landeda) ha, goude-se, e Gwaien.

Deskiñ a reas brezhoneg e-unan hag e tarempredas tud ouiziek evel an Uhel*, Herri Gaidoz pe Emil Ernod*. Kenlabourat a reas e galleg gant ar *Revue Celtique*, ar *Revue des Traditions populaires*, *Mélusine* hag all, met ur bern krenlavarioù brezhonek a bep seurt a zastumas ivez, embannet da gentañ gant ar *Revue Celtique*, er bloavezhioù 1870-72, a-raok bezañ moulllet e stumm ul levr e 1878.

War-dro 1880 e kuitas Breizh evit mont da enseller e Remiremont (Vosges, 88200). Eno e kendalc'has da labourat war dachenn ar werinoniezh hag e lakaas moullañ, e ti Maisonneuve e Pariz, ur *Folklore des Hautes-Vosges* e 1889. En hevelep bloavezh e voe anvet da enseller-meur e Boulogne-sur-Mer e lec'h ma varvas tri bloaz goude pell diouzh ar vro.

Levr.:

Lavarou koz a Vreiz-izel dastumet ha troet e gallek, Moul. Champion, Pariz, 1878, in-8°, 168p.

Dave.:

NRB : 1/1953/68 ; Y. Le Berre : *La littérature de langue bretonne* ; Brest, 1994, eil levr p.467.

- T -

TALBOURDET, Louis

Loeiz Talbourded

(Kemperle 08-06-1791/Kemper 08-01-1873)

Beleg. Daoust dezhañ bet ganet e Kemperle ne oa ket ur brezhoneger eus Loeiz Talbourded. Setu perak, goude bezañ bet beleget, e 1814, e voe anvet , war e c'houlenn, e Sant-Vazhe Kemper evit deskiñ brezhoneg. Goude bezañ bet kure e Pouldregad e voe anvet da berson lerc'h-ouzh-lerc'h e Gwaien, Kombrid, Kore ha Sant-Yann-Drolimon. Ne ro ket kelaouenn an Eskopti bloaziadoù an anvidigezhioù-se. Daou vloaz ha pevar-ugent e oa pa varvas aluzener ospital Sant-Atanaz Kemper.

Levr.:

Diviz etre ur missionner ac ur mezyer var sujet ar vesventy hep intancion da choqui dèn e paticulier, Typographie de..., Kemper, 1840, 123p.

Dave.:

Dielloù eskopti Kemper.

- W -

WILLIAMS, James

(Talacharn (Bro-Gembre) w.-d.

1818/Chester (Bro-Saoz) w.-d.1898)

Ganet e kontelezh Caerfyrddin (Bro-Gembre), e Talacharn (Laugharne e saozneg). Ober a reas e studi e Skolaj kalvinour Bala hag e voe beleget e 1842. Dimeziñ a reas neuze gant merc'h an Ao. Jones, pastor Bala, hag o-daou a zeuas da Vreizh da vevañ e-lec'h ma chomjont tregont vloaz. Ober a reas e annez er Faoued (Bro-Wened), da gentañ, hag eno eo e teskas brezhoneg. Krouiñ a reas c'hoazh iliz vetodist an Oriant a-raok mont da Gemper da bastor. Embann a reas e Pariz, e 1860, ul levr gallek, *La Basse-Bretagne et le Pays de Galles*, ennañ e rebech da Gervarker* daleañ da dreiñ ar Bibl e brezhoneg. Pevar-ugent vloaz e oa-eñ pa varvas e Bro-Saoz. E droidigezh eus ar salmoù a voe moulet e Bro-Gembre moarvat daoust dezhi da vezañ bet embannet e Pariz.

Levr :

Levr ar psalmou, lekeed e brezonnek hervez ar vam-scrid hebre, Pariz, 1873, 213p., in-18.

Dave.:

L. Dujardin, *Les protestants et la langue bretonne*, 1950, p.73.

